

RADIO KREIZ BREIZH

RKB, GWAGENNOÙ STROÑS

Ur radio kevredigezhel teiryezhek eo RKB, ennañ 5 den gopret, hag a skign war-eeun sonerezh, keleier, sevenadur hag abadennoù diwar-benn an ekonomiezh. N'eus ket par d'ar radio-se, a zo staliet e Rostrenn ar radio abaoe 2021, hag a vez o sikour krouiñ liammoù sokial etre an dud. Warlene e oa bet lidet e 40 vloaz... hag emañ e skipailh e-sell d'ober traoù e-leizh.

Gwendal ar C'hozh, Tomaz Laken, Morgan Large, Maëlle Augias ha Gildas Henoù, dougerien RKB, en o studio e Rostrenn. // Kredad : Philippe Josselin

Nevezamzer 1983, ur radio bihan a zeu war wel en ur studio e Sant-Nigouden, e-kichen Kallag : Radio Kreiz Breizh. Adal ar penn-kentañ e voe komprenet e oa disheñvel diouzh ar all : skignañ a ra abadennoù e galleg hag e brezhoneg, met ivez e gallaoueg hag e saozneg. Abalamour da « *chom tost ouzha ar vro hag ouzha an dud, da lakaat ar c'heleier politikel hag an oberourien sevenadurel hag ekonomikel war wel, dezhe da gontañ o istor dimp* » eme Wendal ar C'hozh, kenurzhier ar radio abaoe penn-kentañ ar bloaz. E penn-kentañ an avañtur e oa ar studio « *en ur garavanenn da gentañ, en un ti dilezet goude-se, a-raok mont da lojañ e sal argouelioù* ». En e-unan en em sante ar skipailh eno, se zo kaoz e oa aet kuit e 2021 evit mont da Rostrenn, en un ti bras m'en em gav meur a gevredigezh asambles hag a labour evit reiñ lañs ha brud da Greiz-Breizh, evel Dastum pe Ty Film.



NEVEZENTIOÙ HA SOÑJOÙ E-LEIZH E-BARZH O FENN

Diouzh tu an nevezentioù ez eus ur frekañs nevez abaoe deroù miz Meurzh e bro Pempoull, ar 107.5. Diouzh tu ar soñjoù emañ skipailh ar radio kevredigezhel e-sell d'ober traoù a-vil-vern, ha faotañ a ra dezhañ skignañ pelloc'h c'hoazh. 2025 a zlefe bezañ a-walc'h ur bloavezh talvoudus evit ar radio : « *Ur studio zo hon eus e Gwengamp, ha faotañ a ra dimp diorren ar skourr-se gant ur programm difer peder eurvesh, ha goprañ ur c'hazetenner pe ur gazetennerez nevez hag a labourfe en takad-se. Ur frekañs nevez e korn-bro Sant-Brieg-Pempoull a zlefeomp kaout ivez dre an DAB+.* » An DAB+ ? Un doare niverel eo evit ar radio FM hag a c'haller gantañ selaou ar radio digoust ha kuit da goumanantiñ d'un oberataer hezoug. Ur pezh labour all zo war ar stern, « *reiñ da glevet dielloù*

ar radio diwar-benn buhez an dud er vro abaoe 1982, un teñsor ma zo eus unan! ». E kav ar studio e Rostrenn emañ dielloù ar radio e-pad 40 vloaz, miret mat e koufroù digustum un tamm : koufroù bank. Aes eo

eme Gildas Henoù, *teknikour ha stummer war ar mediaoù. En unan e lakaer ar gaoz war ar mod ma vez fardet keleier ha neuze e lakaer ar skiant varn e-keñver ar mediaoù da sevel e spered ar re yaouank. En unan all*

« HARPAÑ AN DUD DA GAOUT SKIANT VARN E-KEÑVER AR MEDIAOÙ »

kompen perak : « *Gwechalle e oa ur bank en ti-mañ* », eme Wendal.

Ouzhpenn skignañ abadennoù ha labourat war an traoù nevez a zo war ar stern eo pouezus-tre evit RKB reiñ lañs d'an deskadurezh war ar mediaoù. « *Bezañ zo ganimp teir modulenn evit ar skoloù hag ar skolioù e Kreiz-Breizh hag e Bro-Dreger,*

en em soñjer war ar modoù da anavezout ar falskeleier er rouedadoù sokial. Hag erfin e kinnigomp d'ar skolioù krouiñ danvez diouzh o mod evit ar radio, evel podkastoù, atalieroù deskoni war ar radio pe c'hoazh abadennoù evel pa vijent skignet war-eeun. » RKB a zalc'h da skignañ avat ha da zigeriñ divskouarn an dud. ●

● PLUS D'INFOS
rkb.bzh